

DISPUT

COMPOSET A NEVEZ

ENTRE

UR C'HEREER

HAC

UR BOTOER COAT.

563 B

a?

Var un ton nevez.

Mar gallan gout or secon, e teuin da rima
Eun disput a neve flam, d'en em divertissa,
Savet entre ar C'hereer hac ar Botoer coat :
Ra vent crog en eur boutail int daou pot dilicat.

O daou o deus prometet e mige digante,
Goude formigeun disput excellant entrese ;
Eun doucen vio fritet hac eun tam bara guen,
Hac eur banne da effa en fin ar ganaouen.

Mar be glebiet an anchen ar bombard a zono,
A zilao gant parfeti eundarn a resonno,
Vit ho lacat da zisput an eil oc'h e guile
Ha neu pas rima heta nemert ar virione.

— Er gouau ec'h intentan, eme ar Botoer coat,
E me a zeu daoviscan treid an dud dilicat,
Ha te, Quereer infam, gant ta votou ler,
A zigaç ar c'hlenvejo hac eun nombr a vizer.

— Eun tam eo istimet huelloc'h ma etat
Evit n'en deo da hini, pot ar Botoer coat.
Ma rance beajerien bale gant sorgello,
E vent eun anter hirroc'h oc'h ober campagno.

— Evit prepari'n douar da lakat an trevat
Eo eun dra necesser cavet eur botou coat,
Ne voeler den o palat er parc gant botou ler
Ha c'hoas e fell dit laret ne n'on get necesser.

— Goud a ran eo ar botou coat a gonserv ar yec'het
Hac a brepar an douar evit lacat an ed,
Evel ma c'her da redec er parc gant o vejo
E scanvoc'h ar botou ler evit eur sorgello.

— 2 —

— Pa deui an'erc'h, hac ar scorn, hac ar gouan calet,
 E ranko ar C'heneer pac a vinaouet ;
 Ha me doucho an arc'hant partout er marc'hajo,
 Ha te a sellou ouzin ha digor da c'hen.

— Pa erruo ar mis meurs, hac an neve amzer
 Da visca an habijo brao hac ar botouler,
 Neuze na vo istimet netra ar boto coat ;
 Ur boto ler da vale a so traou dilicat.

— Alies e renq'es mont da dy ar c'hivijer
 Ha na pe nemet tri scoet pe eun tri scoet anter,
 Ha me laca assambles hete c'huec'h uguent scoet
 Da brena ar c'hoat boto evit ar baysantet.

— Goel a ze dit, ma mignon, pa teus eur bern arc'hant ;
 Au neb o deus nebeutoc'h a vev honestamant.
 Me a deb q'ic ha zouben, ma yod da greis-de :
 Ordinal ec'h intentant ou bevet couls a te.

— Poent eo din fioissa rac an nos a dosta,
 Hac an hostis a jeno pa na effomp netra,
 Hac a roï din hon c'honje, Coader a Q'ereer,
 Da bartian deus he dy ha mont da gaet ar guer.

— Ebars en hostaleri e vo rezonio,
 Disput entre ar vignonet ha chass-bleo evecho ;
 Ar c'hoste crea c'hone ebars en peb affer
 Mar q'eres ni a velo, eme ar C'heneer.

Goude leis cov e crogjont vel daou guy animet,
 Ha stag an d'en em gannan evel tud malisset,
 Q'en ha ranq'as an hostis q'emer e vas ribot,
 Ha sq'ei voar zin disregui en facon ma oant crog.

Goulennomp eur chopinat d'en em dispartia :
 An hostis on servijo mar deuomp d'e bea,
 Hac evomp pep a vanac'h e fin ar ganaouen ;
 An oll a ranc caout boto pe vale dierc'hen.

An hini en eus rimet an disput dilicat
 Savet entre eur C'heneer hac eur Botoer coat,
 En eus gret meur a hini, e mano Yan ar Goen,
 Hac a veler ordinal en fin ar ganaouen.



FIN.